

Le Febvre Gabriel - Gab Liskildry (1863 - 1927)

Stign da delenn

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Stign da delenn

D'am mignon hag amezeg Kalon-Dir
evid e zonig kentañ « Ma Bro'' kinniget din.

Eur steredennig a welan
 'Paouez sevel.
Ha stumm ganti c'hoantaad lintrañ
 War Breiz-Izel.

Eun tamm muioh a sklêrijenn
 Dre ar mêzio',
Da verraad an deñvalijenn
 Ewar¹ ar Vro !

Eur mab a gresk evid difenn
 Enor e Vamm ;
War dal Arvor eur berlezenn
 A-nevez-flamm !...

Da daolig-esa, Kalon-Dir,
 A zo mad-tre ;
Lasosk warni hag e ri, en gwir,
 Treo² a -zoare.

Pa vouskan ken brao an evnig
 C'hoaz en e nez³,
Na dudiuz 'vo e zonig
 Pe 'nije mez !

Mar zo bannou en heol-veure
 O tispakañ,
Tarzañ, broudañ rey 'n e greiste
 'Lin an oabl splann...

Gand an dir a zo 'n ez kalon
 Gra eur hleze,
Da vrezellata, ma mignon,
 'Vid ar Gwir Fe' !

¹ Ewar : war

² Treo : traou

³ nez : neiz.

Eur hleze a daolo luhed
 'Vel eun taran,
Hag a skarzo an hailloned
 'Glask or flastrañ.

Pa zo ijin ha nerz-spered
 Eur barz 'n ez kreiz,
Kas prim da *Groaz Ar Vretoned*⁴
 Soniou e-leiz.

Soniou hag a reio tridal,
 'N o beziou kloz,
O soñjal en amzer gwechall,
 On zadou koz.

Soniou hag a yelo dre-oll
 War an avel,
Hag a skedo evel eun heol
 Dre Vreiz-Izel...

Stign da delenn evid kanañ,
 A beb eil tro,
Ewar an toniou ar haerrañ,
 Doue... Ar Vro !!...

⁴ *Groaz Ar Vretoned : Kelaouenn Vallée.*